

KANTIK SANT GUENOLE

E COLLOREC



Var ton : En em gonzolit evit mad.

Diskan :

Kristenien Breiz, bezomp joauz,
 Rentomp holl gloar da Zoue :
 Hon Alvokad dirag Jezus
 Eo hon Tad Sant Guenole,
 Ha dindan e skoazell nerzus
 Kerzomp oll varzu an Ee.

1. Guenole, Abostol eurus,
 Enor ha gloar Breiz-Izel,
 Dre eur vuez rust ha poanius
 Oc'h en em rentet santel :
 Grit ma kerzimp var roud Jezus,
 M'her c'harimp beteg mervel.
2. Allas ! Ni n'hon deuz ket miret
 Sae gaer hor Badiziant,
 Saotret eo bet dre vil bec'het
 Hon ene gant ar zerpant ;
 Pedit ma vezimp pardonet
 Ha na vezimp mui ken diskiant.
3. C'hui ar c'henta ho c'heuz sanket
 Ar Feiz e Breiz-Izel,
 Hon tadou koz ho c'heuz rentet
 Kristenien vad ha santel :
 Eveld'oc'h da Lezen Doue
 Grit ma vimp bep'pret fidel.
4. Var an douar, var ar môr doun,
 E peb leac'h roit asistans ;
 D'an nep ho ped a vir galoun
 Gant feiz ha gant esperans,
 Hag an dud hag ar bagou
 A ziouallit a wall chans.

5. Ha ma tiroll abers Doue
 An amzer d'hor c'hastiza,
 'Vit disprijout e volonte,
 Dilezel ar Mestr kenfa,
 Grit ma vo peoc'h en hon ene,
 Hag en oabl eol o para.
6. C'hui hag a zo er memez gloar,
 Oll Elez-euz an Envou,
 Meulit ganeomp eur Zant dispar,
 Ha kanit e vertuziou,
 Rag Guenole a ioa bepred
 Eun eal var an douar.
7. O Collorec, parrez eurus,
 Peger bras eo ho poñeur !
 Kaout eur patron ken galloudus
 D'ho tifen en nep malheur.
 Enorit bepred gant respet
 Ho patron madeleuz.
8. Sant Guenole, ni ho suppli,
 Roit deomp ar c'hras er bed-ma
 Da garet Jezus ha Mari
 Beteg hon heur diveza,
 Ha ganeoc'h d'ar Baradoz
 E zaimp da veuli Doue.
9. Euz an Nenvou d'ho pugale
 Roit ho penediksion
 Ni ho suppli Sant Guenole
 Hag ho ped a vir galon.
 D'eoc'hu Patron karantezus
 E konsakromp hor bue.

~~~~~  
 Imprimatur :

Kemper, 8 a viz Here 1912.

A. COGNEAU, V. g.